

CHANSON NEVEZ

Savet gant eun Den yaouank trahisset gant e Vestrez

Var Don : MELODIUS ORPHÉE.

1

Rir nantez eun gurgite vazto e ververet
Ma goseing e latin na vign ket komprenet
Setu me reaz va zonz d'explika bresonnek
Degant oll dud eur vro ma me a vo silaouet

2

Didostet oll dud yaouank da silaouet kanna
Eur chanson nevez savet en eur blavez presant
Ho hini zo savet en eur blavez presant
Da lavar blavez pemp var nuguen degoude naontek-kant

3

Ma vesign victorius e lerc'h a mon scriva
Evel guechal Napoleon var ar blacen Yena
Da raf diman he talant hag hive eur speret
Da rima va chanson peguir maï komposet

4

A zo diorh daou zen yaouank zo deuz ha c'hontray
Unan a zo deuz Elliant, hini all deuz Coray
N'im heulla ran partout dre en asambleou
Credi a ra dud dega lar ar ven priejou

5

En eur sulvez davardaë teuz eur sonj em fen
Ser ober en droiat pourmen m'ont da vel va fleuren
Peguir eo digoët breman m'euz eun tamik amzer
M'ont a reon d'ober eun droiat tre betek he guer

6

Express evit he guellet ha goulén de ganti
Evet gouzout heon maï kontant da zemezi
Va mestrez a zo guen kaër degant e bleo melen
He diou chod a zo ken ru evel a diou rozen

7

Pa eoan digouezet er guer me velez anezi
Hi a lavarez diman m'ont tre betek he zi
Gant eur pliadur iean en daou essamblez

18

Ha c'henta maoue bed goudeze remarked va mestrez
Oa da bardon gouel Yann gant he gamaradez
Be a oan heno ho diou n'im baset var blenen
Setu me a remarkez va dousig va fleuren

19

Hi pa velez he c'hanomp reoz hon er c'hoarzinn
Pa eoan he beteg heni me gouezez dam daoulinn
Evit henori eur plac'h rouanez eur merc'hied
C'hui doll ho sklerijenn dre lerc'h a dremenfed

20

Be a peuz en er chichen hag ive eur liou tener
Represanti ha ret c'hroas kaeroc'h evit Lavallier
Pehini va het da Versaill degant he braouete
Da ober eur favorit he palez ar roue

21

Bonjour deoc'h plac'h yaouank pelzo meuz ket ho guelet
Kredi reon voarc'h maro pa deuz ar vro partiet
Setu pa zon digouet breman asamblez
Degant en hini maouet choazet evit beza ma vestrez

22

M'ont a reant en daou tre dan hostelleri
Evit ober amour dezhi hag evit minn amuzi
Me zigasez dezhi sonj he komzo he zad
Pere hag he oa ped evidom kalonad

23

Me ho ped plac'h yaouank da zon d'ham konsoli
Ha da lakat ho konfianz cbarz hen hini
C'hui ha peuz plac'hig yaouank eur galoun re dener
Evit d'hon dilesel ho fidel servicher

24

Penaoz ta denig yaouank paouet bet eur vadelez
Da zon d'ham choazi evit beza da vestrez
Me renko ho telezi ann draze zo serten
Ha pedi reon n'omp neuz d'hon mui d'he dani na fen

Evit tremen en tamik amzer barz ti va mestrez

8

Heno vam het an daou da gonle eur c'hrogou
Lavaret naouem an eil deguile visom bet priegou
Hi ha lavarez diman oa pelzo dezired
Dieus a graez he c'halon da vezo va fried

9

Raxe ta plac'hik yaouank assuret o komzou
Me a vo heverusorc'h evit krouer an envou
Pa vimp uniset an daou gant Doue eternal
Evel voa roue Achab d'ar princess Jezabel

10

Mont a reon d'he goulenn gant he mam hag et tad
Pere respontez dimann komzou dezagreab
Lavaret a rean dimann penaoz oant ket kontant
Peguir na maouet ket evel dezi arc'hant

11

Raxe da denik yaouank desul d'ha zijonjal
Mez n'empechont ket deoc'h da gavet unan al
Ha klevet eur c'homzou-ze va c'haloun va rannet
Hag an dour a zirede deuz va daoulagad

12

Me droez dezo ma c'hregn lavarez deza kenavo
Evel ra eur zoudard yaouank pas ven m'ont da armou
Kemer rean pen an hen evit m'ont d'har ger
Pe oan he eur penad gant han eon dre ar parker

13

Mez eur sonj deuz ma vestrez he oa barz em speret
Ha degant eur ran galoun na oan ket evit kerzet
Pa eoant karget an hen hag ive ran galon
Me lakat em sonj d'ha komposi eur chanson

14

Kompozet dimant eur chanson ha da mestrez fidel
Peguir he ma zon deut breman d'he dilesel
Selu me teuaz neuze da lakat he ma sonj
Peguir meuz kavet breman eur momadik repoz

15

Evit kaouet eur c'haloun da vezo triomphant
Goulenn ha reon dam zikour roue ar firmamant
Breman he m'ont he meur lerc'h da komposi eur chanson
Me c'houlenn puissanz Annibal eloquanz Ciceron

16

Mez diman vank an talant hag ive ar speret
M'ha c'houlenn gant Doue vo diman akordet
Evel naouet akordet guechal d'ar roue Jozue
Eur buissanz d'ha arreti an heol evit astenn an de

17

Evit kaouet eur c'halout da akomplisa va desir
Evel ha naouet guechal rouanez eur palmir
Da rei diman komziou sklear komposi va chanson
Rag merc'hed ar c'hontre ma eo treset c'halo

25

Rak me ha jomou c'hroaz eur penad da blac'h yaouank
Ken ha vo deut ma breur dar guer deuz ar rejimant
Henez ha zo breman barz he zervis
Ha douget ann armou he kear Baris

26

Prononset ha naoue dimann neuze dre he c'hromzo
Barz ar vro zo c'hoaz merc'hied ha sur c'hui ha gavo
C'hena zo en denn digourdi hag eur potr delikad
Be ha peuz selou mignoun eur balan agreab

27

Hag orc'h eun denn yaouank da merc'hied zo mignon
Ben ha ret deuz eur c'hreiz de da frite deuz ho pichon
Hen draz a ra deorc'h beza karet gant ar merc'hied
Helerc'h chom gant han da zorna nitore'h pichonet

28

Kenavo plac'hig yaouank kruel evel neron
Be a peuz bet eur c'haloun da drahisa c'hanon
Be a peuz eur c'hruote ha daouet eur juserien
Pere neuz lakat d'ar maro eur Salver souverain

29

Me renko m'ont breman da vevan en hermitaj
Pe m'ont da Jeruzalem d'ober pelerinaj
Pe m'ont da c'halouped bro da labourad he ker
Rak ho labourad douar heo breman ma vicher

30

Bezo labourat pad eur gouanon fas deuz seiz sort amzer
Didann pere ha ren kont ho souffr kalez mizer
Bezo eur park ho labourat fas d'ar glaou d'an avel
Var eur reo deuz ar vitinn hag didann eur grijel

31

Hag ben vo deut en henvou didan en eol brillant
Pehini doll he sklerijen var tout eur firmamant
Taol ra he sklerijen var eur loar eur steret
Enn Europ populizet degant linen Japhet

32

Ma fell deoc'h gouzout breman piou neuz he komposet
Mont ha rann deslika deorc'h ha sur ha gomprenfet
Rosporden ma c'hanton Elliant ma faress
Ma fell deorc'h gouzout ma c'hano me zo *Benoit Frances*

33

Me a zo ganet d'ar bemp varn'ugen
Deuz ar blavez mil heiz kant huezec ha pevar-ugen
Demeuz an er c'hristen an hini verk an histoar
Dibaouet c'huerc'h mil vloa zo eo fonded an douar

34

Leignoc'h ac menez bris Boisdaniel Keraudren
Renez zo en dro diman evel eur gurunen
He pelerc'h vesign beb sul paseal ma amzer
Samblez gant friponnet all deuz ar memez kaler.

FIN —